

# Potred ar Mein-Glaz

War don renket : *Ma Mestrez koant*


*Eun tammik buan*



Ar c'hil-lok ru en deuz ka - - net, An An-ge-



lus di - ja 'n euz so - net ; Lammit hep trouz, war' ho treid



noaz : War sao, war sao ! Potred ar mein glaz ! War sao, war



sao ! Potred ar mein glaz !

1

Ar c'hillok ru en deuz kanet,  
An Angelus dija 'neuz sonet ;  
Lammit hep trouz war ho treid noaz :  
War sao, war sao ! Potred ar Mein-Glaz !

*Holl*

War sao, war sao ! Potred ar Mein-Glaz !

2

Ha da genta, sonjit buan  
En ho Touc, eun tammik bihan ;  
Prim eur *Bater*, eur sin-ar-groaz :  
Pedit, pedit, Potred ar Mein-Glaz !

*Holl*

Pedomp, pedomp, Potred ar Mein-Glaz !

3

Debrit souben, evit kafe  
Ha roet eur pok d'ho pugale,  
Ha (marleze bete ware'hoaz)  
It d'al labour, Potred ar Mein-Glaz !

*Holl*

Prim ! d'hon labour, Potred ar Mein-Glaz !

4

Dindan an Douar, it 'ta, beo,  
Elec'h ma 'z imp pa vefomp maro !  
En kalon Breiz, ha dounoc'h c'hoaz,  
Diskennit 'ta, Potred ar Mein-Glaz !

*Holl*

Diskennomp 'ta, Potred ar Mein-Glaz !

5

Mein-Glaz zo red d'hon tiegez,  
Kleuzit bemdez evidomp, paourkez !  
Keit ma n'ho po — marvat, siouaz ! —  
Med eun ti-soul, Potred ar Mein-Glaz !

*Holl*

Med eun ti-soul, Potred ar Mein-Glaz !

6

Eun ac'hanoc'h, re aliez,  
A varv en noz e-kreiz ar Menez...  
D'an holl, siwaz, pa son ar Glaz  
Pebes glac'har, Potred ar Mein-Glaz !

*Holl*

Pebes glac'har, Potred ar Mein-Glaz !

7

Mez kalounek eo hon potred,  
Micherourien evel Zoudarded,  
No deus krenet rag mann biskoaz !  
Kerzit bepred Potred ar Mein-Glaz !

*Holl*

Kerzomp bepred ! Potred ar Mein-Glaz !

8

Deut eo an Deiz eus an Druetz :  
Dond a rei hini ar Varnerez !  
Mez hep kounnar hag hep droug-oaz  
Gortozit-han, Potred ar Mein-Glaz !

*Holl*

Gortozomp 'ta, Potred ar Mein-Glaz !

9

Evit labourat hep anken,  
Elec'h eva, kanit 'ta, laouen !  
Ar gwinn-ardant a zo fall-gwaz,  
Kana zo gwell, Potred ar Mein-Glaz !

*Holl*

Kanomp ! Kanomp ! Potred ar Mein-Glaz !

10

Ha Doue varlere'h ho Maro,  
'N e Varadoz d'oc'h a lavaro :  
— « Dindan mein-glaz ma " Santier Vraz " »  
Deut 'ta breman, potred ar Mein-Glaz !

*Holl*

« Antromp hardi ! Potred ar Mein-Glaz ! »